


ESKOPTI KEMPER ha LEON



KENVREURIEZ
ar
BREZONEG

K A I E R I 7

D' ol lonnerien

Setu amañ penaoz eo renket bremañ ar strolladou a labour endro d'al lidêrêz vrezonég, harpet gand an Aotrou N'Eskob V.Fave, eskob skoazeller Kemper ha Leon.

1. Strollad an troidigeziou: An Aotr. Chalonî Elard, Keraudren - 29-N Brest, endro dezañ eun neubeud mad a genlabourerien.

2. Mer rez ar gelaouenn: KENVREURIEZ AR BREZONEG; An Aot. Job Seite, Skol an Aod - 29 N-Guissény. C.C.P. I 738 - 66 - Roazon

3. Strollad ar zonêrêz: An Aotr. R. Abjean, Sant-Vaze- 29 N-Montroulez, skoazellet gand A. Seznec, person Poullgoazec, M. Skouarnec, skdaj Ponte-Kroaz, F. Roudaut, rener "Kenvroiz Dom Mikael" Plougerne

4. Eur strollad all a zo, renet gand J. Irien, 24, rue Marceau, Brest, endro dezañ beleien ha laiked, o klask an tu gwella da astenn al lidêrêz e brezonég er parrezioù.

5. Evid an overennou Radio ha T.V., e Breiz, an Aotr. Chalonî Mevellec, rener ar gelaouenn "Bleun-Brug", aluzenner er Salett, Montroulez.

Evelse, e ouezoh da biou skriva evid tra pe dra ho pefe c'hoant da houzaud pe da houlenñ.

Gand an niverenn-mañ e krogom en eur rummad nevez.

Pedet oh eta da renevezi ho komanant evid ar bloaz 1971-1972:

I5 lur da gas d'an Aotrou Job Seite, 29-N GUISSENY. CCP I 738-66 RENNES

T A O L E N N ar H A I E R I 7

Sul kenta an Azvent(A).....p.	I
Eil sul an Azvent(A).....p.	3
Trede sul an Azv nt(A).....p.	6
Pevare sul an Azvent(A).....p.	8
Steuenn eun overenn.....p.	II
Tachonn ar zonerezh.....p.	I9 bis

Overennou ar Bloavez C ha n'int ket bet embannet:

I2ed sul ordinal.....p.	20
I3ed sul ordinal.....p.	22
I4ed sul ordinal.....p.	24
I5ed sul ordinal.....p.	27
I6ed sul ordinal.....p.	29

Evid kaoud Overennou NEDELEG, gweloud Kaier II p.I6

Lennadenn genta.

Jeruzalem, "Kêr ar peoh". Siwaz! Nag a drouz endro dezi! or Zal-
ver a zeuio da lavared komzou a beoh.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz (2/I-5)

1. Setu amañ ar pezh a welas Izaiaz, mab Amoz,
diwar-benn bro-Juda ha kêr Jeruzalem.
2. Digouezoud a ray, eun deiz da zond,
ma vo laketa war gern ar menezioù
ha savet a-uz d'an uhelennoù,
ar menez m'eo diazezet warnañ ti an Aotrou Doue;
war-zu ennañ e tiredo an oll boblou;
poblou niveruz a gemero an hent hag a lavaro:
3. Deuit, savom war menez an Aotrou Doue
da di Doue Jakob;
ma tesko deom e heñchou ha ma sentim outañ.
Rag euz Sion e zeuio al Lezenn,
euz Jeruzalem komzou Doue.
4. Barn a ray ar poblou
ha lakaad ar peoh etre broadou niveruz.
Gand ar hlezeier e hovellint sohou-alar
ha gand ar goafou e raint filzier.
Poblod ebed na zavo ar hleze a-eneb unan all,
ne vo mui desket ober brezel.
5. Deuit, tud euz famill Jakob,
ha kerzom ouz sklerijenn an Aotrou Doue.

SALM

I2I/I, 2, 3, 4, 8, 9

Diskan: Stad a oa ennon pa 'z eus bet lavaret din:
Deom da di an Aotrou Doue.

1. Stad oa ennon pa 'z eus bet lavaret din:
Deom da di an Aotrou Doue.
2. Ha setu ni chomet a-zav
dirag da zoriou, Jeruzalem.
3. Jeruzalem, savet evel ur gêr,
unanet start enni an tiez,
di e pign ar meuriadou,
4a. meuriadou an Aotrou Doue.
8. Dre garantez evid va breudeur, va mignoned,
e houlennom evidout ar peoh.
9. Dre garantez evid ti an Aotrou, on Doue,
e houlennom evidout levenez.

EIL LENNADENN.

Tost ema evidom mare ar zilvidigez; tehom diouzh ar pehed.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned. I3/II-I4

- II. Va breudeur, gouzoud a rit e peseurt amzer e vevom;
poent eo deom dihuna euz or housk;
mag mare ar zilvidigez a zo tost deom bremañ
eged pa oam deuet d'ar feiz.
- I2. Ema an noz oh echui, tostaad a ra an deiz;
dilezom an oberou a deñvalijenn
ha kemerom armou ar sklerijenn.
- I3. Bevom en eun doare deread, evel e-kreiz an deiz;
chomom heb dibri nag evl dreist ar muzul,
tehom diouz an hudurnez hag ar pehejou lous,
ar vuaneged hag ar warizi.

14. Kemerit ennoh spered an Aotrou Jezuz Krist
ha na rit ket re v Rao d'ho korv,
en ur heulia e youlou.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia! Alleluia !
Aotrou, diskouezit deom ho madelez
ha roit deom ho silvidigez. Alleluia!

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (24 / 37-44)

37. Evel m'eo bet kont en amzer Noe,
evel-se e vo ivez da zonedigez Mab-an-den.

38. An deiziou a-raog an dour-beuz,
an dud a zebre hag a eve;
dimezi a reent, paotred ha merhed,
beteg an deiz ma 'h antreas Noe en Arh.

39. Ha n'o devoa douetañs a netra,
beteg ma teuas an dour-beuz d'o samma oll.
Evel-se e vo kont da zonedigez Mab-an-den.

40. Neuze, euz daou zen a vo er park,
e vo kemeret unan ha lezet egile.

41. Euz diou vaouez a vo o vala gant ar vreo,
e vo kemeret unan ha lezet egile.

42. Beillit eta, rag n'ouzh ket pe da zeiz
e teuo ar mestr.

43. Komprenit mad! M'e-nefe gouezet mestr an ti
da beseurt mare euz an noz e vefe deuet al laer,
e vefe chomet war hed ha n' e-nefe ket lezet
toulla moger e di.

44. Bezit eta prest, c'hwi ivez,
rag dond a ray Mab-an-den
d'an eur ne zonz ket deoh.

PEDENNOU EVID SUL KENTA AN AZVENT.

PEDENN AN DIGOR:

I. Pedom Doue ! Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg, roit d'ho tud fidel ar hoant
gwirion-mañ: da vond leun a oberou mad en arbenn d'ho Salver
pa zeuio, evid beza plasat a-zeou en e gichen, ha kaoud perz gantañ e rouantelez
an neñv. Drezañ, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken.

2. WAR AR PRODU:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou a ginnigom diwar ho tonezonou;
pegwir e roit deom, ho servicherien er bed-mañ, ar hras d'ober anezo sakramant
Korv ha Gwad Or Zalver, grit ma kavim gantañ ar silvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION:

Grit ma ray vad deom, Aotrou Doue, an overenn on eus kemeret perz enni:
dreizi, e keit m'emaom o veva e-kreiz traou tremenuz ar bed,
e troit dija or halonou da gared madou an neñv, na dremenint ket,
ha da jom stag outo.
Dre Jezuz Krist Or Zalver. AMEN !

LENNADENN GENTA

Jezuz euz lignez Jese ha David eo ar Meziarz; deuet da zigas er bed eur spered nevez.

Lennadenn euz levr ar Profed Izaiaz II/I-IO

1. Eur skourr a darzo diwar gwezenn Jese,
ha diwar e gwriziou e savo eur greskenn.
2. Warnañ e tiskunno Spered an Aotrou Doue,
Spered a furnez hag a skiant,
Spered a guzul hag a nerz,
Spered a anaoudegez hag a zoujañs Doue.
3. E zudi a gavo o veva e doujañs Doue.
Ne varno ket diouz ar pezh a wel e zaoulagad
na diwar ar pezh a glev e ziskouarn.
4. Barn a ray gand lealded an dud a renk izel;
hervez ar reiz e vo e zetañs evid tud dister ar bed.
Skei a ray an douar gand e gomzou,
evel gand eur wialenn.
5. Gand ar justis e vo gourizet e groaz-lez
ha gand ar fealded e zargreiz.
6. Ar bleiz a vevo e peoh gand an oan,
arpanter a hourvezo e-kichen ar menig,
al leue, al leon hag an ejenn a beuro asamblez,
ur paotrig dezo da vesaer.
7. Ar vich hag an ourzez o-devo ar memez prad,
o re vihan ar memez neiz;
al leon a zebro boued-chatal evel an ejenn.
8. Ar bugaleg c'hoaz war e vamm
a c'hoario war doull an naer aspig
hag an hini dizonet
a lakay e zorn war neiz an naer-viber.
9. Droug ebed, na distruj na vo mui greet,
hed-a-hed va menez santel,
rag an anaoudegez euz an Aotrou e-no golōet ar vro,
evel ma veuz an douriou strad ar mor.
10. Ha setu petra 'zigouezo neuze!
gwrizienn Jese, savet er vann evel eur banniel evid ar poblou
a vo klask warni gant ar broadou
ha leun a hloar e vo e demeurañs.

SALM

71 /I,2,7,8,I2,I3,I7

Diskan: En e amzer e vleunio ar justis
hag e vo peoh frouezuz da viken.

1. Aotrou Doue, roit ho kalloud d'ar roue,
hag o furnez da vab ar roue.
2. Ma ouezo beza just o ren ho pobl
ha kemer soursi euz ar re baour, ho tud fidel.
7. En e amzer, e vleunio ar justis hag e vo peoh frouezuz,
beteg ma ne baro mui al loar.
8. Mestr e vo euz an eil mor d'egile,
azaleg ar Ster vraz beteg pennou pella ar bed.
12. Divehia 'ray ar paour a zav e vouez da glemm
hag ar paour-kêz a zo heb skoazell.
13. Truez e-no ouz an den dister hag an hini dibourvez,
savetei 'ray o buez d'ar re baour.

17. Ra bado da viken e ano;
 ar brud anezañ d'en em astenn keid ha ma skedo an heol.
 Ennañ e vo benniget oll ouennou an douar,
 hag an oll vroïou a gano meuleudi dezañ.

EIL LENNADENN

Kerzom war roudou Or Zalver Jezuz krist.
 Rontom gloar da Zoue;
 bezom mad an eil e-keñver egile.

Ennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned. 15 / 4-9

4. Kement a zo bet skrivet
 a zo bet skrivet evid or helenn,
 evid m'or-bezo ar perz da houzañv hag ar frealz
 a ro ar Skrituriou.
 5. Doue ar gouzañv hag ar frealz
 da rei deoh ar hras da gaoud an eil evid egile
 ar memez santimañchou, hervez ar Hrist Jezuz.
 6. Evid ma teufeh da renta gloar da Zoue,
 Tad Or Zalver Jezuz Krist,
 gant an heveleb kalon hag an heveleb mouez.
 7. Grit eta digemer an eil d'egile
 evel m'e-neus ar Hrist greet digemer deoh
 evid gloar Doue.
 8. Rag, lavared a ran e-neus ar Hrist
 en em laket da zervijer an androh,
 evid enori ar gwirion m'eo Doue,
 en eur zeveni ar promesaou greet gantañ d'on tadou.
 9. Ar bayaned int-i a rent gloar da Zoue,
 en abeg d'e drugarez,
 hervez m'eo skrivet:
 " Setu perag e veulin ahanoh etouez ar bayaned
 hag e kanin evid enor hoh ano.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia! Alleluia! Kempennit an hent d'an Aotrou; eeunit dezañ e wenojennou.
 Peb den a welo ar zilvidigez euz a Zoue. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze (3 / I- 12)

1. En amzer-ze, e oe gwelet Yann-Vadezour, o prezeg
 e goueleh Bro-Juda.
 2. " Bezit keuz d'ho pehejou, emezañ,
 rag Rouantelez an neñvou 'zo war nez digouezoud."
 3. Anezañ eo e-noa komzet ar profed Izaïaz, pa lavare:
 " Eur vouez a gri er goueleh:
 kempennit an hent d'an Aotrou,
 eeunit dezañ e wenojennou."
 4. Yann a zouge eur wiskamant greet gand reun kanval
 hag eur gouriz lâr er lro d'e groaz-lez;
 killeien-radenn ha mel gouez a oa e vevañs.
 5. Dond a ree davetañ
 tud Jeruzalem, bro-Judea ha tro-war-dro ar Jourdin
 en eur añzao o fehejou.

7.0 weled kalz Farizianed ha Saduseaned

o tond da veza badezet,

e lavarar dezo:

"Gouenn naered, piou e-neus roet dech ar zonz

da dehed dirag ar gounnar a zo o tond.

8. Diskouezit 'ta dre hoh oberou eo gwirion ho keuz.

9. N'it ket da lavared ennoh hoh unan:

" Abraham eo on tad."

Rag me a lavar dech e hell Doue euz ar vein-mañ

sevel bugale da Abraham.

10. Ar vouhal a zo dija war gwrizienn ar gwez;

kement gwezenn ne daol ket frouez mad

a vo trohet ha stlapet en tan.

11. Me ho padez en dour evid ma rafeh pinijenn;

med, an Hini a zo o tond war va lerh

a zo galloudusoh egedon

ha n'on ket din da zougen dezañ e voutou;

Eñ eo ho padezo er Spered Santel hag en tan.

12. Ar bal-wenta a zo en e zaouarn;

skuba ray e leur

hag ar greun a vo dastumet er zolier (HRIGNOL);

ar pell avad a vo taolet en tan ha ne varv ket.

+++++

PEDENNOU EIL SUL AN AZVENT

PEDENN AN DIGOR: Pedom Doue!

Doue oll-halloudeg ha madelezuz,

grit ma ne vo soursi nag afer ebed euz ar bed-mañ

o herzel ouzom da vond en arbenn d'ho Mab en e zonedigez,

med grit ma vezim o heulia kenteliou ar furnez euz an neñv,

lakeet da gaoud perz gantañ da viken:

Eñ on Doue beo ganeoh ha gant ar Spered Glan,

a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PRO'OU : Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma hounezim ho trugarez

gand or pedennoù hag or provou;

ha, pa 'z eo re zister or meritou evid rei puez d'or goulennou,

deuit d'or skoazella gant sikourioù ho madelez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION: Pedom oll a-unan !

Maget gand ar bara euz an neñv, ni ho ped, Aotrou Doue,

dre hrasou an overenn on eus bet perz enni,

deskit deom priza gant furnez traou ar bed-mañ,

ha trei or halon ouz madou ar baradoz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

LENNADENN GENTA

Delivrañs Israel. D'ar Yuzevien harluet e Kêr Babilon, e ro ar Profed da houzout ema tost ar zilvidigez. G. and donedigez ar Mesias, ar bed a-bez a gemero eur stumm nevez.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz. (35 / I-6a , IO)

1. Ar goueleh hag an douarou kraz a drido,
an douarou fraost a vo levenez enno
hag a vleunio.
2. Goloet e vezint a vleunio ha tridal a raint,
rei a raint da gleved youhadennou a joa.
Roet e vezo dezo gloar ar menez Liban,
gand lufr menez Karmel ha plênenn Saron.
Gwelet e vo gloar an Aotrou, sked meur on Doue.
3. Kennerzhit an daouarn eet skuiz,
startait ar pennou-glin deuet da horjella.
4. Lavarit d'ar re 'zo strafuillet o spered:
Kemerit kalon,
aon ebed da gaoud, setu ho Toue.
Gantañ e teu ar hastiz hag an digoll,
dond a ray, En e-unan d'ho savetei.
5. Neuze e vo digoret daoulagad ar re zall
ha distanket diskouarn ar re vouzar.
- 6a. Neuze e lammo an den kamm evel eur haro
hag e vo distagellet teod an hini m d.
- IO. Ar re zasprenet gand Doue a zistroio;
dond a raint da Zion en eur gana gand joa,
eul levenez beurbaduz a skedo war o fenn.
Kaget e vezint a joa hag a levenez,
tehed a ray diouto ha poan ha doan.

SALM I45

7,8,9a,9bc,IO

DISKAN: Deuit, Aotrou Doue, d'or savetei.

pe

Meulom oll, heb paouez,
Doue hag e vadelez.

7. An Aotrou Doue a zalh atao d'e hér,
a rent o gwir d'an dud gwasket,
a ro bara d'ar re o deus naon,
An Aotrou a zistag ar re 'zo chadenet.
8. An Aotrou 'ro sklerijenn d'an dud dall,
an Aotrou a laka sonn ar re bleget (AR RE GROUMMET),
an Aotrou a gar an dud a vuez vad,
an Aotrou 'zo divennour an dud estren.
- 9bc. Skoazella 'ra an emzivad hag an intañvez,
ha kas a ra danetra menoziou an dud fall.
- IO. Roue 'vo an Aotrou da viken,
ho Toue-c'hwil, Sion, a rumm da rumm.

EIL LENNADENN

Kemerit pasianted! Donedigez an Aotrou a zo tost.

Pennad euz lizer Sant Jakez.

(5 / 7-IO)

7. Va breudeur, kemerit pasianted, beteg donedigez an Aotrou.
Gwelit al labourer-douar:

gand an esperañs da gaoud frouez talvouduz euz e zouar,
 e hortoz gant pasianted,
 beteg ma teuo glaoeier an diskar-amzer
 ha glaoe-ier an nevez-amzer.
 8.Kemerit pasianted,c'hwi ivez,startait ho kalonou,
 rag tost ema donedigez an Aotrou.
 9.Va breudeur,na glemmit ket an eil eneb egile,
 gant aon na vefeh barnet;
 setu m'ema ar barner e toull an nor.
 10.Evid kaout kalon da houzañv ha da reuzi,
 kemerit skouer,va breudeur,war ar brofeded,
 o deus komzet en ano Doue.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia! Alleluia !

Spered an Aotrou a zo warnon.

Kaset e-neus ahanon da brezeg ar feiz d'ar beorien.

Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (II / 2-II)

2. Yann-Vadezour,en e brizon,o veza klevet ano
 euz ar pezh a ree ar Hrist,
 a gasas daou euz e ziskibien da houlenn outañ:
 3." Daoust ha c'hwi eo an Hini a dle doned,
 pe unan all eo deom gortoz ? "
 4.Jezuz a respontas dezhañ:
 " It da lavared da Yann ar pezh a welit hag ar pezh a glevit:
 5.Ar re zall a wel,
 ar re gamm a gerz,
 an dud lovr a gav ar pare,
 ar re vouzar a glev,
 ar re varo a adsao da veo,
 ar re baour a zo prezeget dezo an Aviel.
 6.Eñruz an neb ne vezint ket evitañ tro da goueza."
 7.O veza m'edont o vond kuit,
 e komzas Jezuz d'ar bobl diwar-benn Yann:
 " Petra ez oh eet da weled er goueleh ?
 eur raokklenn hejet gand an avel ?
 8.Petra ez oh eet,eta,da weled ?
 eun den gwisket gand dillad kaer
 a zo o chom e paleziou ar rouaned.
 9.Med,da weled petra ez oh eet ?
 da weled eur profed ?
 Ya,m'hel lavar deoh,hag ouspenn eged eur profed.
 10.Rag,eñ eo an hini a zo bet skrivet diwar e benn:
 " Setu ma kasan va hannad en da raog,
 evid ma kerzo en da raog ha ma kempenn an hent dirazout.
 II.E gwirionez,m'hel lavar deoh:
 E-touez bugale ar gwragez n'eus deuet hini ebed
 hag a vefe brasoh eged Yann-Vadezour.
 Koulskoude ar bihanna,e rouantelez an neñv
 a zo brasoh egetañ..

PEDENNOU evid TREDE SUL AN AZVENT

PEDENN AN DIGOR: Pedom Doue !

Aotrou Doue, pa welit ho pobl o hortoz gand feiz
gouel braz ginivelez Or Zalver,
grit deom, ni ho ped, digeri or halon da joaiou eur zilvidigez ken dispar,
evid ma raim gouel Nedeleg gand meuleudiou solanel,
er vrasa levenez bepred.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar
Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU: Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talhim bepred,

ni ho servicherien devot, da ginnig deoh ar zakrifi,
evid lida mister sakr an aoter, e-neus ho Mab lezet ganeom da ober,
hag evid sacha warnom grasou nerzuz ho zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION : Pedom oll a-unan !

Ho madelez a bedom, Aotrou Doue:
sikouret gand ar magadur divin on eus resevet,
ra vim gwalhet euz or pehejou,
ha lakeet e stad da lida ar gouel braz a dosta.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

pevare sul an azventLENNADENN GENTA

Evid rei esperañs d'ar roue Akaz, ar profed Izaiaz a denn ano
dezañ euz eur hinivelez vurzuduz da zond. Jezuz eo a dlee dond,
sin a zilvidigez.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz. (7/IO-I4)

IO. Doue a gomzas da Akaz hag a lavaras dezañ:

II. " Goulenn eur zin digand an Aotrou, da Zoue,
e donder an iverniou pe e barr an neñvou."

I2. Akaz a lavaras :

Ne houlennin netra, ne fell ket din tenti Doue."

I3. Neuze e lavaras Izaiaz:

" Selaouit 'ta, tud euz famill David,
daoust ha n'eo ket awalh deoh skuiza an dud,
ma teuit ouspenn da skuiza Doue ?

I4. Abalamour da ze, Doue e-unan a roio deoh eur zin:

" Setu ma konsevo eur plah yaouank en he hreiz,
genel a ray eur mab,
hag a vezo roet dezañ an ano a Emmanuel.
Dienn ha mel a vo e vevañs,
beteg ma ouezo trei kein d'an droug
ha dibaba ar mad.

SALM 23

1, 2, 3, 4ab, 5, 6

Diskan:

ANTreal a ray an Aotrou;
Eñ eo ar roue a hloar.

I. D'an Aotrou eo an douar hag e oll zanvez,
an douar a-bez ha kemend a vev ennañ.

2. Eñ e-neuz diazezet an douar kalet dreist ar moriou,
a zalh anezañ divrall a-uz d'an doureier.
3. Piou a bigno war menez an Aotrou
ha piou a gavo digomer en e di santel ?
4. An hini eo dizroug e zaouarn ha glan e galon
ha n'eo ket techot da heulia an idolou goullo.
5. Hennez a resevo digand an Aotrou
ha digoll just digand Doue, e falver.
Setu ar ouenn-dud a glask e zervija,
a glask servij ar gwir Doue.

ELL LENNADENN

Sant Paol a skriv da gristenien Kêr Rom ha dioustu e tenn ano
dezo euz Jezuz Krist gwir den ha gwir Doue.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned. I/ I-7

1. Me, Paol, servijer Jezuz Krist, galvet da veza abostol,
dibabet da brezeg ar Helou Mad,
2. bet prometet dija gand Doue,
dre ar Brofeded ha dre ar Skrituriou,
a gas deoh al lizer-mañ,
c'hwi karot gand Doue, o chom e Kêr Rom.
3. Ar Helou Mad-se a zo diwarbenn e Vab:
hervez e natur-den eo ganet euz gouenn David.
4. horvez ar Spered a ro santelez,
dre e adsa da veo a-douez ar re varo,
eo bet lakot Mab Doue en e halloud,
Eñ Jezuz Krist, on Aotrou.
5. Evid ma vo enoret e ano, on- us resevet drezañ
ar hras hag ar garg a abostol,
evid digas d'ar entidigez euz ar feiz,
an oll boblou payan
- ez oh anezo, c'hwi ivez -
c'hwi hag a zo bet galvet gand Jezuz Krist.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia !

Setu e vo ar Werhez dougerez,
hag e vo mamm d'eur mab,
a vo anvet Emmanuel,
da lavared eo: Doue ganeom. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz an Aviel Santel hervez Sant Vaze. (I/I8-24)

I8. Ganedigez Jezuz Krist a zo bet erruet evelhenn.

Pa oa Mari, e vamm, dimezet da Jozef, med a-barz m'o devoa bevet asamblez,
eo bet anavezet e oa dougerez dre vertuz ar Spered Santel.

I9. Jozef, he fried, den santel ha mad anezañ,
pa ne 'felle ket dezañ he dizenori,
e-neus laket en e benn en em zispartia diouti dre guz.

20. Troet e-neus ar zonzou-se en e spered,
pa zeu eun El d'an Aotrou da bara dirazañ e-kreiz e gousk,
o lavareddezañ: " Jozef, mab da Zavid, arabad deoh kaoud aon
o kemer Mari, ho pried, en ho ti,
pegwir ar pezh a zo krouet enni a zo euz ar Spered Santel.

21. Genel a raio eur mab, a roiot dezañ an ano a Jezuz, rag eñ eo a zalvo e bobl euz he fehedou."

22. Kement-se a hoarveze, evid ma teuje da wir ar pez e-noa lavaret an Aotrou dre vouez ar profed:

23. "Setu e vo ar Werhez dougerez, hag e vo mamm d'eur mab, a vo anvet Emmanouel, da lavared eo: Doue ganeom."

24. Jozef, goude beza savet, a ra neuze evel m'e-neus lavaret dezañ El an Aotrou:

kemer a ra e bried en e di, hag e mired a ra gwerhez;

25. p'he deus-hi laket er bed eur mab, e ro dezañ an ano a Jezuz.

+++++

PEDENNOU PEVARE SUL AN AZVENT

PEDENN AN DIGOR: Pedom Doue !

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, skuill ho kras en or halonou; +
ni hag on eus anavezet, dre zalud an El, mister ho Mab, en em hrêt den,
heñchit ahanom, dre e basion hag e groaz,
beteg gloar an adsao da veo.

Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver hag On Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered
Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU: War ar provou, laket amañ war hoh aoter, Aotrou Doue,
ra ziskenno d'o zantellaad ar memez Spered Glan,
e-neus karget gant e vertuz korv sakr ar Werhez gloriuz Vari.
Ni ho ped dre Jezuz Krist, Or Zalver.

GOUDE AR GOMUNION: Pedom oll a-unan !

Ho pedi a reom c'hoaz, Aotrou Doue, goude m'on eus bet,
er gomunion an arrez euz ar zilvidigez peurbaduz: +
seul vui ma tosta ar gouel a zigas deom ar Zalver,
grit deom mond war well gant seul vui a garantez,
evid lida e doare mister ginivelez ho Mab,
Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

Evid overennou Nedeleg, gweloud Kaier XI p.16

PE WAR GAN EVIT OR PARREZIOU

1. KAN AN DIGOR : ur salm

pe ur hantig da zibaba hervez ar sul pe ar gouel.

2. SALUD AR BELEG : (an toniou, war BREIZ A GAN N° 3, p. I)

En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. AMEN !

(goude sin ar groaz, ar beleg a hell lavared unan euz an tri alud-mañ)

a/ Va breudeur, gras santel or Zalver Jezuz Krist,
karantez Doue an Tad ha sklerijenn ar Spered Santel,
ra vint ganeoh oll.

HA GAND HO SPERED.

b/ Plijet gand Doue on Tad, ha gand Or Zalver Jezuz Krist, e vab,
skuilla warnoh oll bennoz he pech.

MEULEUDI DA ZOUE, TAD OR ZALVER JEZUZ KRIST !

c/ An Aotrou Doue ganeoh !

HA GAND HO SPERED !

3. LID AR BINIJENN :

ar beleg: Va breudeur, pa'z om oll pekerien, taolom eur zell ennom on
unan ha goulennom pardon, evid beza e stad vad da lida an
overenn.

(kenderhel hervez unan euz an tri doare-mañ)

a/ Oll a unan:

Me 'anzav dirag Doue oll-halloudeg,
ha dirazoh, va breudeur,
am eus pehet braz,
dre zoñj, dre gomz, dre ober ha dre jom heb ober.
Rag-se e houlennan digand ar Werhez-Vari,
an Elez hag an oll Zent,
ha diganeoh, va breudeur, pedi Doue evidon.

ar beleg: Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom,
pardon deom or pehejou,
ha kas ahanom d'ar vuez peurbaduz. AMEN !

b/ ar beleg:

Ho pet truez ouzom, Aotrou Doue.

an oll: RAG PEHET ON-EUS EN HO KENVER .

ar beleg:

Diskouezit deom ho madelez.

an oll: HA ROIT DEOM HO SILVIDIGEZ.

ar beleg: Plijet gant Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom,
pardon deom or pehedou,
ha kas ahanom d'ar vuez peurbaduz. AMEN !

I2 an overenn

c/ ar beleg pe ar haner: (BREIZ A GAN N° 3 p.2)

1. Salver Jezuz, bet digaset war an douar,
evid or zilveridigez: Aotrou Doue, ho pet truez !
2. C'hwi hag a zo deut er bed-mañ,
evid gelfer ar beherien: Aotrou Krist, ho pet truez !
3. C'hwi hag a zo bremañ e gloar an Tad evid tenna
warnom e vadelez: Aotrou Doue, ho pet truez !

ar beleg: Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom,
pardon deom or peheou,
ha kas ahanom d'ar vuez peurbaduz. AMEN !

(gweloud: leor an overenn evid an aoter p.37)

4. GLORIA :

- I. Gloar da Zoue (a hell beza kanet war tri don:)
a/ Ni ho salud, steredenn vor - N° 74
b/ D'ar Pantekost - N° 6
c/ Donezonou ar Spered Santel - N° 17

Diskan: Gloar da Zoue, e lein an neñv,
ha pech d'an dud war an douar !

- | | |
|--|---|
| 1/ Bezit meulet, Aotrou Doue,
mil bennoz deoh ha trugare!
A-dreuz ar bed, ni gan ho kloar,
ho kalloud hag ho sked dispar. | 3/ Meuleudi deoh, Salver Jezuz,
gwir Vab d'an Tad karantezuz;
Oanig Doue, treh d'ar pehed,
ho pet truez ouzom bepred ! |
| 2/ Ni hoh ador, Doue an Tad,
Roue an neñv, Doue oll-vad:
ken braz eo bet ho karante,
m'ho peus kaset ho Mab er bed. | 4/ Klevit pedenn ho tud fidel,
Roue ar Bed, savet d'an neñv;
da viken gand ar Spered Santel,
On Doue beo e gloar an Tad. |

2. Gloar da Zoue (hervez an destenn latin)
ton el Leor-Overenn evid an Aoter p.37

Gloar da Zoue e barr an neñvou !

Bezit meulet, bezit trugarekeet, bezit adoret.
ha pech war an douar d'an dud a blij dezañ.
bezit enoret, bezit benniget evid ho kloar
dispar.

Aotrou Doue, Roue an Neñv, Doue an Tad Oll-halloudeg.

Aotrou, Mab Unganet, Salver Jezuz.

Aotrou ha Doue, Oan Doue, Mab an Tad.

C'hwi hag a zilam pehed ar bed, ho pet truez
ouzom !

C'hwi hag a zilam pehed ar bed, digemerit galv or pedenn.

C'hwi azezet en tu deou d'an Tad,
ho pet truez ouzom !

Rag C'hwi hebken a zo santel.

C'hwi hebken eo an Aotrou.

C'hwi hebken eo an Uhel-meurbed, Salver Jezuz.

Gand ar Spered Santel, e gloar Doue, an Tad.

AMEN !

6. LENNADENN GENTA.

7. SALM. (gand eun diskan, alies war eun ton breizad)

8. EIL LENNADENN.

9. SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! (Leor-Overenn evid an Aoter:p.38)
pe:(toniou all diwar BREIZ A GAN NO 3 -p.7)

ar beleg: An Doue ganeoh !
HA GAND HO SPERED !

ar beleg: Pennad euz aviel Jezuz Krist hervez Sant.....

GLOAR DEOH C'HWI, AOTROU KRIST !

goude an Aviel: (BREIZ A GAN N° 3 -p.I4)

ar beleg: Setu komzou Doue ! (BREIZ A GAN N° 3 - p.I4) 3 respont:

1/ Meuleudi deoh, Aotrou Krist, meuleudi deoh da virviken !

2/ Grit d'or spered kompren komzou Doue ha d'or halon o miret
goudeze.

3/ Meuleudi da Jezuz Krist en e Aviel Santel !

10. KREDO.

1. Me 'gred en eun Doue hebken,
an Tad oll-halloudeg, krouer an neñv hag an douar,
kement a weler ha kement na weler ket.

Hag en eun Aotrou hebken, Jezuz Krist,
Mab Unganet da Zoue,
euz an Tad eo ganet araog an oll gantvejou,
Doue euz Doue, sklerijenn euz sklerijenn,
Doue gwirion euz Doue gwirion;
Ganet, ha n'eo ket greet, kennatur gant an Tad;
ha drezañ eo bet grêt peb tra.

Evidom-ni an dud, hag evid or zilvidigez,
eo bet diskennet euz an neñv;
Ha korv e-neus kemeret, dre nerz ar Spered Santel,
euz ar Werhez Vari ha den eo deut da veza.

Evidom ivez staget ouz ar groaz,
e-neus gouzanvet dindan Pons Pilat,
hag er bez eo bet laket.

D'an trede deiz eo savet a varo da veo,
herv z ar Skritur Zakr. Pignet d'an neñv,
emañ azezet en tu deou d'an Tad;

Hag adarre e teuio gand gloar,
da varn ar re veo hag ar re varo,
ha ne vo fin ebed d'e rouantelez.

Me 'gred er Spered Santel, a zo Doue hag a ro buez ;
a zeu euz an Tad hag euz ar Mab;
Par d'an Tad ha d'ar Mab, eo adoret hag enoret,
ha komzet e-neus dre ar Brofeded.

Me 'gred en Iliz,
a zo unan, santel, katolik hag abostoleg.
Anzav a ran ez eus eur vadiziant hebken,
evid pardon ar pehe-jou.

Ha gortoz a ran a'sao ar re varo da veo,
ha buez ar bed da zond.

AMEN !

II. an overenn

2. Me 'gred en eun Doue hebken: war don:

1/ gourhemennou Doue.

2/ pedennou diouzh ar mintin

3/ kantik Sant Yann

1/ Me 'gred en eun Doue hebken,
'zo a-viskoaz 'vo da viken,
Doue an Tad all-halloudeg,
Krouer an neñv hag an douar.

3/ Maro er groaz, lakeet er bez,
eo savet beo d'an trede dez,
pignet d'an neñv a-zeou d'an Tad,
da hortoiz dond da varn an oll.

2/ Hag en Or Zalver Jezuz Krist,
Gwir Vab d'an Tad, Doue 'veltañ,
en em hrêt den d'or savetei,
ganet gand ar Werhez Vari.

4/ Va feiz 'zo c'hoaz er Spered Glan,
en Iliz santel hag unan
hag en adsao ar re varo,
'vid ar vuez a bad ato.

II. PEDENN AN DUD FIDEL.

gweloud: Leor-Overenn evid an Aoter:p. 4I

BREIZ A GAN N° 3 p.I6

1. Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn !

2. Aotrou Doue madelezuz, klievit or pedennou !

3. Selaouit, Aotrou, ar bedenn a zav euz or halon !

I2. KINNIG AR PROVOU

gweloud: Leor -Overenn evid an Aoter:p.8

an oll: Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

an oll: Bennoz da Zoue, bremañ ha da viken !

Epad ma kinniger ar bara: (ton: Amañ pell diouzh an trouz.)

pe:

1/ Kemerit, va Doue,
lodenn euz or bara,
evid ma teuio da veza
Korv or Zalver, e gwirionez.

1/ Kinnigomp, gand an Iliz,
ar bara 'vid ar Zakrifiz;
or magadurez pemdeziek
'vo troet e bara an neñv.

Epad ma kinniger ar gwin:

2/ Kemerit c'hoaz ar gwin,
frouez ho madelez,
grit anezañ Gwad Or Zalver,
evid ar Vuez peurbaduz.

2/ Deuet deom dre vadelez Doue,
frouez an douar, ar gwin ive
'vo troet e Gwad Or Zalver,
e Sakrifiz-Meur an Aoter.

ar beleg: - Pedom, oll, va breudeur, ma plijo da Zoue,
an Tad, ar Zakrifiz ez eom da ginnig.

an oll : - Evid gloar Doue ha Silvidigez ar bed.

I3. PEDENN WAR AR PROVOU

....Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

I4. DIGOR AR BEDENN-VEUR.

gweloud: Leor-Overenn evid an Aoter. p. 10, 2I, 42

An Aotrou Doue ganeoh. HA GAND HO SPERED.

Ho kalon d'an uhel ! TROET EO WARZU DOUE.

avarom bennoz da Zoue, on Aotrou! JUST HA SANTEL EO.

PREFAS

Just ha santel eo, evid gwir,
eun dra dleet ha talvouduz,
lavared eoh trugarez, Tad Santel,
e peb leh hag e peb amzer,
dre Jezuz Krist, ho Mab karet.
Eñ eo ho komz beo, ho peus dreizañ krouet peb tra,
eñ an hini ho peus digaset deom,
evel Salver ha Dasprener,
Doue deut da veza den dre nerz Spered Santel,
ha ganet euz ar Werhez Vari.
Evid ober penn-da-benn ho polontez
ha prena an dud d'ober anezo ho pobl santel,
e-neus astennet e zivreh war ar groaz:
en eur vervel e-neus distrujet ar maro,
en eur zevel beo euz ar bez,
e-neus diskouezet e hloar.
Setu perag a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da embann ho kloar,
en eur gana deoh meuleudi:

an oll: (ton: Al leor-overenn evid an aoter :p.39 ha BREIZ A GAN N°3-p.13)

SANTEL, santel, santel an Aotrou Doue, Mestr ar Bed.
Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar.
Hozanna e barr an neñvou!
Benniget an Hini a zeu en Ano Doue !
Hozanna e barr an neñvou !

15. PEDENN-VEUR II

E gwirionez, C'hwil 'zo santel, Aotrou Doue,
hag ahanch e teu peb santelez.
Plijet ganeoh eta santellaad ar provou-mañ,
dre nerz ho Spered Glan,
ma teuint da veza evidom
KORV ha GWAD + Or Zalver Jezuz Krist.

— En noz ma oa gwerzet, ha m'en em ginnige deoh,
evid gouzañv e Basion,
Jezuz a gemeras bara,
ha, goude beza rentet deoh bennoz ha trugarez,
e dorras hag hen roas d'e ziskibien,
en eur lavared:

" KEMERIT OLL, HA DEBRIT EUZ HEMAÑ,
RAG VA HORV EO, ROET EVIDOH. "

— Evel-se c'hoaz, goude koan, e kemeras ar halirad gwin,
e rentas deoh adarre bennoz ha trugarez,
hag hen roas d'e ziskibien, en eur lavared:

" KEMERIT OLL, HAG EVIT EUZ AR HALIRAD-MAN,
RAG WA GWAD EO, GWAD AN EMGLEO NEVEZ HA PEURBADUZ,
A VO SKUILLET EVIDOH HAG EVID AN OLL DUD,
DA BARDONI AR PEHEJOU.
C'HWIL 'RAIO KEMENT-MAN, GAND AR ZONJ AHAN'N. "

I6 an overenn

I6. GOUDE AR GORREOU

ar beleg: SETU amañ Mister ar Feiz ! (BREIZ A GAN N° 3 - p.25)

an oll : Ni soñj gand feiz, Salver Jezuz,
en ho Maro ken prasiuz.
Meuleudi deoh, Savet da veo:
ni ho kortoz da zond en-dro !

I7. KENDALC'H AR BEDENN-VEUR II

Gand ar zoñj eta, euz Or Zalver maro evidom,
ha savet euz ar bez leun a vuez,
e kinnigom deoh, Aotrou Doue,
bara ar vuez ha kalirad ar zilvidigez,
gand or brasa trugarez,
evid an digemer a rit deom, amañ,
hag an eurvad da helloud kinnig deoh an overenn.

Gand eur galon izel,
e reom ouzhoh ar bedenn-mañ:
Pa gemerim bremaig KORV ha GWAD Or Zalver,
ra vezim unanet kenetreuzom,
dre ar Spered Santel.

Ho pet soñj, Aotrou Doue,
euz hoh Iliz, skignet dre ar bed a-bez.
Grit ma kresko enni ar garantez,
a-unan gand on Tad santel ar Pab,
an Aotrou 'n Eskob,
ha kement hini e-neus karg euz ho pobl.

Ho pet soñj c'hoaz euz or breudeur eet da anaon,
gand an esperañs da zevel a varo da veo,
hag euz an oll dud tremenet:
roit dezo ar joa da weled
sklerijenn ho Tal en ho paradoz.

Warnom-ni, ivez,
plijet ganeoh skuill ho madelez,
ma hellim kaoud perz er vuez peurbaduz,
a-unan gand ar Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue,
gand an Ebestel eüruz hag an oll Zent euz peb amzer.

Ni rento deoh neuze gloar ha meuleudi
dre Jezuz Krist, ho Mab karet

en overennou evid an anaon:

Ho pet soñj euz ho servicher..
.....ho us galvet euz ar
bed-mañ davedoh: pegwir eo bet
unanet gand Or Zalver, ho Mab,
bet heñvel outañ o tremen dre
ar maro, grit ma vo par dezañ
ivez, o sevel euz a varo
da veo.

A zo dreizañ, ha gantañ hag ennañ,
deoh-C'hwi, Doue an Tad Oll-Halloudeg,
a-unan gand ar Spered Glan,
pep gloar ha pep enor,
a oll-viskoaz da virviken !

AMEN !

I8. PEDENN OR ZALVER

(gweloud: Leor-Overenn evid an Aoter P.3I
BREIZ A GAN N° 3.p. 30)

ar beleg: Kenteliet gand gourhemenn Or Zalver,
ha desket ma 'z om bet gantañ da bedi,
e kredom lavared:

an oll : On Tad hag a zo en neñv,
hoh Ano bezet santelleet,
ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grêt,
war an douar evel en neñv.

Roit deom hirion or bara pemdezieg.
Pardonit deom or pehejou,
evel ma pardonom d'ar re o deus mañket ouzom,
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
med on diwallit diouz an droug.

ar beleg: On dizammit, Aotrou Doue, diouz peb droug,
ha plijet ganeoh rei deom ar peoh en on amzer,
ma vezim bepred, dre ho madelez, distag diouz ar pehed
ha diwallet diouz an oll drubuillou,
da hortoz an eürusted a esperom
ha distro Or Zalver Jezuz Krist.

an oll : DEOH AR ROUANTELEZ, AOTROU DOUE!
DEOH PEB GALLOU HA PEB GLOAR,
DA VIRVIKEN !

ar beleg: Salver Jezuz Krist, c'hwi ho peus lavared d'hoh Ebestel:
" Ar peoh a lezan ganeoh, va fech a roan deoh;
na zellit ket ouz or pehejou, med ouz feiz hoh Iliz,
ha plijet ganeoh, hervez ho polontez,
he lakad er peoh hag heh unani:
C'hwi on Doue Beo ha leun a hloar,
a oll-viskoaz da virviken . AMEN !

PEOH OR ZALVER, ra vo bepred ganeoh ! HA GAND HO SPERED.
Kinnigit ar peoh an eil d'egile !

Korv ha Gwad Or Zalver Jezuz Krist,
unanet er Halir-mañ,
ra vezint magadur deom evid ar Vuez Peurbaduz.

I9. OAN DOUE. (gweloud: Leor-Overenn evid an Aoter. p.40 - BREIZ A GAN N 3-p.37)

an oll : OAN DOUE, a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom.
OAN DOUE, a zilam pehed ar bed, ho pet truez ouzom.
OAN DOUE, a zilam pehed ar bed, roit deom ar peoh .

araog ar gomunion:

ar beleg: Salver Jezuz Krist, Mab an Doue beo,
I/ evid ober bolortez ho Tad ha gand nerz ar Spered Santel,
ho peus, dre ho Maro, roet ar vuez d'an dud;
dre ho Korv hag ho Kwad Santel, me ho ped,
va dizammit euz va oll fehejou hag euz peb droug,
2/ ha grit d'n chom stag ouz ho lezenn,
heb beza morse dispartiet diouzoh.

pe: Jezuz Krist, va Zalver, pa 'z an da gemer ho Korv hag ho Kwad,
mirit na drofe ar gomunion-mañ d'am barn ha d'am hondaoni;
med abalamour da garantez ho kalon, grit ma talvezo d'am diwall
ha d'am farea korv hag ene.

ar beleg: (a vouez uhel)

Eüruz ar re 'zo pedet ouz Taol Or Zalver !

Setu Oan Doue, an Hini a zilam pehed ar bed !

an oll :

Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon,
med lavarit eur ger hebken hag e vin pareet.

ar beleg:

Korv Or Zalver d'am diwall evid ar Vuez peurbaduz.

Gwad Or Zalver d'am diwall evid ar Vuez peurbaduz.

Korv Or Zalver ! AMEN ! (da gomunia an dud)

20. KOMUNION AN DUD FIDEL. (bez e heller kana unan euz ar hantikou-mañ.)

I. Jezuz, pegen braz ve.

1/Joa 'zo leiz va halon,
abalamour d'am Zalver;
Va Doue a veulin
'vid ar vad 'neus grêt din.

5/'Vid beva 'kreiz ar bed,
bezit ganeom, Jezuz.
Roit deom ho spered,
ho nerz, ho karantez.

2/C'hwi eo, Salver Jezuz,
ar bara euz an Neñv;
neb a zebr anezañ
a vevo da viken.

6/Jezuz, beteg bremañ,
mar n'am eus ho karet,
ho karoud a'fell din
hag ho karoud bepred.

3/C'hwi eo ar bara beo,
hini ar gwir vuez.
Maget ganeoh, Jezuz,
me 'vo torret va naon.

7/Ho kweled ne hellan
ha va nesa 'welan:
deskit din e gared,
evel m'ho peus laret.

4/Ganeoh, Salver Jezuz,
e kaver ar vuez.
Ganeoh 'vo eürusted,
peoh ha pinvidigez.

8/Chomit ganeom, Jezuz,
tostaad a ra an noz.
On heñchit, on dalhit,
war hent ar barado.

DISKAN:

Jezuz, pegen braz 've
plijadur an ene,
pa vev e gras Doue
hag en e garante.

9/Deoh eo, Salver Jezuz,
peb gloar ha peb enor,
meuleudi da viken,
en neñv a-zeou d'ho Tad.

2. O Elez ar baradoz, sellit war an douar.

3. Deut, va Doue, deut da ren em halon.

4. Kaer ha plijuz- meurbed eo beva asamblez.

5. Warzu ennoh

6. Karantez vraz an Aotrou Doue.

7. Jezuz, a oll viskoaz.

DISKAN/ O Kalon Zakr Jezuz, Mammenn ar gwir vuêz), entanit va halon gand
tan ho karante(z).

I/Jezuz, a oll viskoaz, ennon ho peus soñjet.

Jezuz, a oll viskoaz, c'hwi ho peus va haret.

2/Petra ho touge-c'hwi da rei **din ar vuez** ?

Petra ho touge-c'hwi,nemed ho karantez ?

3/Perag euz lein an neñv ez oh bet diskennet,
e kraouig Betleem ? - Rag m'ho peus va haret.

4/Jezuz,war ar Halvar,pe liamm ho talhe,
astennet war ar groaz ? - Liamm ho karante(z).

5/Petra 'felle deoh c'hoaz en eur zevel d'an neñv ?
- Digor ar baradoz d'ho pobl a garante(z)

6/Koulz ha war ar Halvar,ho kalon,va Zalver,
evidon-me bemdez a verv war an aoter.

7/O Jezuz,pa 'z eo gwir n'oh nemed karante(z),
perag e choman yen,perag n'ho karan-me ?

8/Glahari ho kalon ne 'fell din mui ober,
med ho kared ervad,va Mestr ha va Zalver.

Eun dra vad eo,goude ar hantig,chom sioul eur pennadig,ma hello
peb hini,e doun e galon,ober ar bedenn a zere ouz e vuez hag ouz e ezommou.

2I. PEDENN GOUDE AR GOMUNION.

ar beleg: Pedom Doue! pe Pedom oll a-unan !

....dre Jezuz Krist,Or Zalver . AMEN !

— An Aotrou DOUE ,aneoh ! HA GAND HO SPERED .

— DOUE oll-halloudeg d'ho pennig,
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. AMEN !

— Kerzit e Peoh Or Zalver ! BENNOZ HA GLOAR DA ZOUE !

+++++

Ni 'gred en eun Doue hepken. (eleh komzou ar bajenn I4)

- | | |
|--|---|
| 1/ Ni 'gred en eun Doue hebken,
bet a viskoaz 'zo da viken,
en Tad alloudeg oll meurbed,
a grouas euz netra ar Bed. | 3/ Ni 'gred stard er Spered Santel,
a gendalh ato e skoazell;
e sklerijenn a splann er bed,
harp d'or buhez a ro bepred. |
| 2/ Ni 'gred er Mab, Salver ar bed,
d'ar maro 'vidom bet lakoet;
d'an trede deiz savet da veo,
e gloar an Neñv, 'sked 'vid atao. | 4/ Ni 'gred en eun Iliz Santel,
a zo Unan hag Ollvedel,
e savim eun deiz a varo,
'vid ar Vuez a bad atao. |

Tachenn ar zonerezh

Evid gelloud ober implij vad euz ar hantikou koz ha nevez, euz ar salmou, el liderezh vrezoneg a vremañ, e kavoh kement a zo red e presbital Sant-Vaze Montroulez.

(Abbé R. ABJEAN - chorale Saint-Matthieu - 29 N MORLAIX)

Setu amañ eul lodenn euz an dastumadou a gaver:

- An overenn: BREIZ A GAN N° 2 et N° 3
JOA D'AN ANAON
OVERENN EN ENOR DA ZANTEZ ANNA
- Kantikou: Recueil N°1 - 24 cantiques populaires harmonisés
Recueil N°2 - 17.....
Recueil N°3 - 24..... pour Noël et Toussaint
Recueil N°4 - 23..... pour Noël et La Vierge

Ouspenn e kaver ive pladennoù (disques) da vond da heul:

- Diou overenn ha salmou nevez - Joa d'an Anaon
 - Nedeleg - Kantikou brezoneg (3 disques) Intron Varia.
 - Overenn Santez Anna er Releg
-

LENNADENN GENTA

Ne vo saveteet an dud nemed p'o devo keuz da veza ofanset Doue.

Pennad euz Levr ar Profed Zakariaz. (I2/I0-II)

IO. D'an deiz-se, me a skuillo, war famill David ha war an dud a vev e Kêr Jeru-
zalem,
eur spered troet d'an drugarez ha d'ar bedenn;
trei a reint o zellou war-zu an hini o deus treuzet dezañ e galon.
Ober a reint kaoñv dezañ evel d'eur mab unig;
daelou c'hwero a skuillint warnañ,
evel ma leñver c'hwero war maro eur mab kenta ganet.
II. D'an deiz-se e vo kaoñv braz e Jeruzalem.

SALM 62

2,3,4,5,6,8,9

diskan:

Sehed ahanoh am eus, va Doue, sehed ahanoh am eus, va Doue.
--

2. Aotrou Doue, c'hwi 'zo va Doue,
C'hwi a glaskan kerkent ha goulou-deiz.
Sehed ahanoh e-neus va ene, dizeha 'ra va hory hebdoh,
evel ma teu an douar heb dour da graza ha da skarnila.
3. En ho ti santel, on deut d'ho kleved,
estlammet gand ho kalloud hag ho kloar.
4. Muioh a dalv d'in ho madelez eged ar vuez,
rag-se, ema ho meuleudi war va muzellou.
5. Ya, bennoz deoh a lavaran 'hed va buez,
en enor d'hoh ano e savin d'an neh va daouarn.
6. Evel gand boued euz an dibab e vo leuniet va ene,
va muzellou o tridal, e kanin ho meuleudi.
8. Eur skoazell oh bet evidon,
ha dindan skeud ho tiouaskell em eus tridet laouen.
9. En em staga a ran ouzoh a greiz va halon;
war nerz ho torn oun harpet.

EIL LENNADENN.

Daoust pegen dishenvel eo an dud dre o gouem, o renk pe o stad,
ar gristenien en em gav unan e Jezuz Krist.

Pennad euz lizer an Abostol Sant Paol d'ar Halated. 3/26-29

26. Va breudeur, c'hwi 'zo oll breudeur e Jezuz Krist,
bugale da Zoue dre ar feiz.
27. Rag c'hwi oll, pa 'z eo bet roet deoh badiziant an Aotrou Krist,
a zo warnoh dremm an Aotrou Krist.
28. N'eus mui ano euz Yudeo ha payan, euz sklavour ha den libr, euz gwaz ha
maouez, peogwir n'hoh nemed unan, c'hwi oll er Zalver Jezuz.
29. Ha ma 'z oh d'ar Zalver, ez oh eta gwir vugale Abraham,
heritourien d'ar madou prometet dezañ gand Doue.

SALUD D'AN AVIEL.

Alleluia ! Alleluia ! Me eo Sklerijenn ar Bed,
an neb a vale war va roudou, e-neus sklerijenn ar vuez. Alleluia !

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz . (9/ I8-24)

I8. En amzer-se, edo Jezuz o pedi en eul leh distro,
hag e ziskibien a oa gantañ.
Ober a ra outo ar goulenn-mañ:
" Piou, a lavar an dud, ez oun-me ?

19. Hag int da respond: "Yann Vadezour, re-all a lavar Eliaz, lod all c'hoaz unan euz ar brofeded koz savet da veo."

20. Jezuz a lavar dezo: "Ha c'hwil, piou a lavarit ez oun-me ? Per eo a respont: " Mesiaz Doue! "

21. Jezuz neuze a ra divenn grons dezo lavaret kement-se da zen,

22. en eur lavared ouspenn: " Red eo da Vab-an-den gouzañv

kalz a boaniou, beza distaolet gand re-goz ar bobl,

ar veleien-vraz hag ar skribed, beza lakeet d'ar maro

ha sevel da veo d'an trede deiz".

23. Hogen, d'an oll e lavare Jezuz: " An neb a fell dezañ kerzed war va roudou, dezañ trei kein dezañ e-unan, dougen e groaz bemdez ha dond d'am heul.

24. Rag an neb a fello dezañ savetei e vuez a hello henn ober, med an neb a gollo e vuez abalamour d'in, a zaveteio anezi.

+++++

PEDENNOU AN XIIvet sul ordinal.

PEDENN AN DIGOR.

Grit deom, Aotrou Doue, kaoud bepred doujañs ha karantez evidoh,

pegwir n'ehanit morse da hentcha en o buez,

an dud a stagit ouzoh gand liamm stard ho karantez.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou, Doue Beo ganeoh,

ha gand ar Spered Glan,

a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Doue a drugarez, ober deom digemer vad,

pa 'zeuom a wir galon da ginnig deoh ar zakrifiz a beoh hag a veuleudi. AMEN!

GOUDE AR GOMUNION.

Goude beza kinniget deoh, e sakrifis, Korv ha Gwad Or Zalver,

ha beza resevet, e teuom d'ho pedi hoaz, Aotrou Doue;

saveteet da viken, ra gavim da vad en eürusted ar Baradoz,

ar madou n'on eus anezo nemed an tañva dre ar feiz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

LENNADENN GENTA.

An den dibabet gand Doue d'e zervij a dle beza prest da zilezel peb tra euz ar bed-mañ. Evelse e welom oh ober Elizea, galvet da veza profed.

Lennadenn euz Levr kenta ar Rouaned. I9/I6b,I9-2I

16. Lavaret e-noa an Aotrou Doue d'ar profed Eliaz:

- " Te a zakro da brofed en da blas Elizea, Mab Safad."

19. Setu Eliaz en hent, ha kavet e-neus Elizea, mab Safad, oh arad; daouzeg devez arad e-noa da labourad hag edo gand an daouzegved.

Mond a ra Eliaz beteg ennañ ha stlepel e vantell warnañ, en eur dremen en e gichen.

20. Elizea a lez aze e ejened hag a red warlerh Eliaz,

- " Roit amzer in, mar plij, da vond da bokad d'am zad ha d'am mamm, hag ez in d'ho heul."

Hag Eliaz a respont: " Kê, distro du-ze,

rag grêt am eus dit ar pezh a oa din da ober."

2I. O veza eet kuit dioutañ, Elizea e-neus kemeret eur houblad ejened, lazet anezo, laket o hig da boaza gand koad ar yeo hag an alar, ha roet da zebri d'an dud.

Goudeze ez eo savet da vond da heul Eliaz

hag eo bet en e zervij.

SALM I5.

I,2a,5,7 II

diskan:

Tridal a ra va halon e Doue ha joa zo em ene.
--

I. Va mirit, Aotrou Doue,

en ho kichen, e kavan repu.

2a. Lavaret a ran dan Aotrou: C'hwi eo va Mestr.

5. C'hwi va lod ha va halirad;

etre ho taouarn ema va flanedenn.

7. Bennoz d'an Aotrou e-neus roet kuzul din;

dre va housk zoken e kendalh d'am hentelia.

8. Heb ehan e talhan an Aotrou dirazon,

p'ema en tu dehou din, ne gouezin ket.

9. Tridal a ra va halon ha joa 'zo em ene

ha va horv ive 'zo er peoh.

10. Na zilezit ahanon e bro an anaon,

ha ne vo ket ho mignon boued ar vreinaadurez.

II. Ober a reoh din anaoud hent ar vuez,

dirazoh ar galon 'zo leun-barr a levenez,

en ho kichen ez eus eurusted peurbaduz.

EIL LENNADENN.

Beza libr eo beza mestr deom on-unan ha n'eo ket heulia froudennoù pe youlou fall an natur, med kabestra anezo hag heulia spered Doue a zo ennom.

PENNAD EUZ LIZER an Abostol Sant Paol d'ar Halated. 5/I,I3-I8

I. Va breudeur, evid ober ahanch tud libr,

e-neus Or Zalver torret deom or chadennoù,

dalhit mad eta ha diwallit da gemered en dro chadennoù ar sklaverez.

I3. C'hwi, va breudeur, 'zo bet galvet d'ar feiz evid beza tud libr,

med arabad e ve ar frankiz-se eun digarez deoh

da heulia youlou fall an natur,

bezt kentoh dre ar garantez servicherien an eil d'egile.

I4.rag al lezenn en he fez a gaver dastumet en eur gourhemenn hebken:

"Kared a ri da nesa evelhout da unan."

I5.Ma ne rit nemet en em gia hag en em zebri kenetrezo,
diwallit na zeufeh d'en em zistruja an eil egile.

I6.Henn lavared a ran:" Lezit ar Spered Santel da ren ahanoh."
ha neuze ne blegoh ket da youlou fall ho natur,

I7.rag hoantegeziou fall an natur ha hoantegeziou ar Spered
a vez an eil a-eneb egile,

beteg mired ouzoh da ober kement a fell deoh.

I8.Med ma lakit Spered Doue da ren ho puez,
n'emaoh mui sujet d'al lezenn.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Ra zeuio Tad Or Zalver Jezuz Krist

da zila e sklerijenn en or halonou. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. (9/ 51-62)

51.Tostaad a rea an derveziou ma tlie Jezuz kuitaad ar bed-mañ,
mond a ra en hent,da vad warzu Jeruzalem.

52.Kannaded a gas en e-raog,mond a reont en eur vorhadenn Samaritaned da ren-
ka an traou evitañ.

53.Med an dud ne felle ket dezo e zigemer,
a'alamour m'eo o vond da Jeruzalem.

54.O weled kement-se,e ziskibien,Jakez ha Yann a lavar:

" Aotrou,mar kirit,e lavarim d'an tan diskenn euz an neñv d'o distruja?

55.Jezuz a dro outo hag a ra gourdrouz dezo.

56.Neuze ez eont d'eur vorhadenn all.

57.Epad o beaj,eun den a deu da lavared da Jezuz:

" Me 'yelo d'hoh heul e kemend leh ma 'z eoh."

58.Jezuz a respont:" Al lern o deus o zoullou,
laboused an neñv o neiziou,Mab-an-den avad,n'e-neus leh ebed da ziskuiza e
benn.59.Unan all a lavar:" Deus d'am heul."

Hag heman da respont: " Valezit da vond da genta da zebelia va zad."

60.Ha Jezuz dezañ: " Eez ar re varo da zebelia o zud varo.

Evidout-te,kerz da embann rouantelez Doue."

61.Unan all 'hoaz a lavar dezañ: " Aotrou,mond a rin d'hoh heul,med araog,
roñt aotre din da lavared kenavo da dud va zi."

62.Ha Jezuz dezañ: " An neb a zell a dreñv,goude beza kroget e pao an alar,
n'eo ket grêt evid Rouantelez Doue."

+++++ diwallit!

PEDENNOU TRIZEGVED SUL ORDINAL er bajenn 28, klask pedennou an I3ved sul

PEDENN AN DIGOR. Aotrou Doue,C^{hw} i hag a lak an oll gristenien da gaoud ar
memez bolontez:+ grit deom kared ho kourhemennou ha c'hoant-
aad ar madou a brometit,hag evelse,tra ma vez peb tra o trei er bed-mañ,chom
heb distaga or halonou euz bro ar wir levenez.Dre Or Zalver J.K.,ho Mab hag
On Aotrou,Doue beo ganeoh ha and ar Spered Glan,a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU:Taolit ho sellou,ni ho ped,Aotrou Doue, war ar provou a ginnig
deoh an Iliz ouz ho pedi;+ grit d'ho tud fidel reseo evid o
silvidigez ar provou-se pa vint bet konsakret.Dre Jezuz Krist,Or Zalver.

GOUDE AR GOMUNION. P'on resevet ar zakramant,ni ho ped,Aotrou Doue, ,+ ma
kresko ennom,o kemer perz en overenn,ar fobuez a zilvidi-
gez.Dre Jezuz Krist,Or Zalver . AMEN !

LENNADENN GENTA

Komz a ra ar profed euz Kêr Jeruzalem,deuet buez enni a-nevez
gand distro e bugale euz an harlu,ha prometi a ra evid pobl
Doue, en amzer da zond,peoh ha lavenez a-berz an Aotrou.

Pennad euz Levr ar Profed Izaiasz.(66/IO-I4c)

IO.Bezit laouen a -unan gand Kêr Jeruzalem,
abalamour dezi,tridit gand levenez,
c'hwi oll,ho mignoned !

Ya,tridit gand al levenez,asamblez ganti,
c'hwi oll hag a zouge kaoñv dezi,

II.C'hwi a vezo maget ganti beteg kaoud ho kwalh,
ouz he feultrin,mammenn a frealzidigez,
ha dudi ho pezo o terri ho sehed gand he gloar en he haer.

I2.Rag evelhen,e lavar an Aotrou Doue:

" Emaoun o vond da gas dezi ar peoh,evel eur steriad dour,
ha pinvidigez ar broadou,evel eur froud lammet dreist he hlannou
ha c'hwi a vo evel ar vugaligou douget war vreh o mamm
ha flouriget war he barlenn;

I3.evel eur hrouadur frealzot gand e vamm,
me ho frealzo,ha frealzot e vezoh e Kêr Jeruzalem.

I4.C'hwi a welo kement so hag ho kalon a vo el levenez,
en hoh eskern e savo buez nevez,evel er geot fresk,
hag an Aotrou Doue a ziskouezo nerz e zorn d'e zervicherien.

SALM 65

I,3a,4,5,6,7a,I6,20

diskan: Savom or mouez da veuli Doue!
Kanom meuleudi d'E Ano !

I.Savit ho mouez da veuli Doue,oll dud an douar,

2.kanit meuleudi d'e ano,gloar hag enor dezañ.

3a.Lavarit da Zoue:pegen kaer hoh oberou,pegen braz ho kalloud !

4.Oll dud an douar a stou dirazoh,kana 'reont ho kloar,
kana 'reont gloar d'hoh ano.

5.Deuit ha gwelit oberou Doue;

kaer estlamm eo ar pez e-neus graet evid mab-den.

6.Euz ar mor e-neus greet douar kalet,

treuzet o deus ar ster war o zroad,

ahano ez om bet laouen,abalamour dezañ,

7a.rag dre e halloud eo mestr ar bed da virviken.

I6.Deuit da zelaou,ma kountin deoh oll,tud a zoujañs Doue ,
pegen kaer traou e-neus greet evidon.

20.Meuleudi da Zoue;n'eo ket chomet bouzar ouz va fedenn
ha n'e-neus ket dilamet dig in e vadelez.

EIL LENNADENN

Un dra hebken a gont evid ar hristen:beza eun den krouet a-nevez.
Kaoud ennañ buez ar Hrist.

Pennad euz Lizer an Abostol Sant Paol d'ar Halated. (I6/I4-I8)

I4.Va breudeur,evidon-me,Doue ra viro na dennfen gloar euz netra nemed euz
kroaz Jezuz Krist,On Aotrou,

a zo bet staget outi ar bed evidon,ha me evid ar bed.

I5.Beza amdrohet n'eo netra,beza diamdroh n'eo netra;

ar pez a gont eo beza eun den krouet a-nevez.

I6.Peoh ha trugarez war gement hini a heulio ar reolenn-se,
ha war Izrael,Pobl an Aotrou Doue.

